

# KLOAREK KOAT AR BANNOU

A

## PENN-HERES KERZANTON

War don : *Kurunen aour ha perlez an Itron Varia, Rumengol.*

**Karantez ha glac'har :**

1.

Tud iaouanq a Vreiz-izel, didostañt da glevet  
Ar recit eus va dañlou ho va foaniou kalet :  
Me zo eur kloarek iaouank a eskopti Quemper  
Am boa choaset eur vestrez en eskopti Treger.

A c'hars ar mor ouñ ganet en bro sant Gwenole,  
Ha biscoas nemet glac'har nem eus bet em buc ;  
*Glac'har a gwir garantez, setu va flaneden,*  
Planeden rust a kalet da heulla pen-da-ben.

Pa oan em bugaleac'h, va vam haour aliez  
A lavare din : « Va mab gar a ped ar Werc'hez,  
« pèd anez-hi, va mabik, ped Gwerc'hez Remengol,  
« Mar e fedez a galon, bigen ne zi da goll. »

Patronez ma mam dener, Gwerc'hez vad Rmengo,  
Ped gweach oc'h euz hu miret da doun me eat da goll !  
He peded am eus bepred, breman, arog mervel,  
E kanin ho meulodi dam breudeur Breiz-Izel.

Pa gimiadiz deoc'h va zud, da ziz pell euz ar ger,  
Evit mont var ar studi en kollach Landreger,  
M'ean boa nemet pemzek vloas, me a welle dourek,  
Rac evidon ne oa ken ; allas !... a eursted !...



O tostaat oc'h Landreger e kavis eur plac'hik ;  
Koant evel eun ælik Doue, he hanno oa Metik  
D'ar gouent a ze ive, doun d'ar studi,  
He c'balonic oa mantret kement a va hini.

« Salut deoc'h plac'h yaouank, a lavariz dez-hi,  
« Evel doun oc'h ankeniet ankeniet o kuitat tud ho ti,  
« Ho tornik flor em dornik laquet gant karantez,  
« Hac sesimp eureussoc'h o wela assemblez. »

Ar plac'hik a lavaras : « O kloarec Gwenole,  
« Pedomp Doue alies an eil evit egile,  
« Er joa kouls hag en anken dalc'hit sonj a Vetik  
« Euz a vieman da viken e ho mestrezik.

« — O Metik va c'harantez rozen gaër Breiz-Izel !  
« War ho mignon Gwenole tolet breman eur zell,  
« Eur zell digant ho lagat a ri eurusted  
« Keit a ma lezo Doue ac'hanon war ar bed. »

Eru en kaër Landreger, eru e pen hon hent,  
Me eo kasset d'ar golach ha Metik d'ar gouent ;  
Ann disparti oa kalet e huc o hag ankeniuz,  
Ann eurusted er bed-man n'eo ket paduz !... .

Dre ma chomiz er kolach skeuden douz Metik kez,  
Eun deis, eun nos diaison he deuc aliez,  
Neuze peden Doue ha Sent kos Breiz-Izel,  
Vit ma vije en e buez, laouen euvreuz, santel.

## II.

Pa eo acbu va studit en hiz da Remengol,  
Da bedi c'hoas evit hi Gwerc'hez-vad *Remed-oll*,  
Seiz tro a riz d'an oter, devez ar pardoun bras,  
Ha seiz tro d'an Iliz zakr war ben ma zaoulin noas.

Goude an offeren-bred, o pebeus levencz !...  
Er vered, gant e man ger, e velet Metik kez  
Laouen eo evel an deiz, ha coant evel a loar,  
Biscoaz penn herez ken koant n'euz bet war an douar.

Lugerni a re zall, he diou chod gwen a ru,  
He gue novel eur rozen, he bleo, he lagad du,

Eur groas aour en he c'herc'hen, e c'hoef dantelezet  
Lavaret vije eun æl euz an év diskennet.

« O pebeus joa evidomp va c'hloarec Gwenole,  
« En em gaout en Remengel deis pardon mam Doue,  
« Mam an oll dud ankeniet, Gwenole, ma mignon,  
« Evidomp e pep amzer he fediz a galon.

« — Metik koant, setn aman, eur voalen aour,  
« — A roas din araog mervel Annaik va mam baour,  
« Doug an zi var da viz, kemer hi digant en,  
« Me dou war goalen ma mam d'ez karet da viken

« — Ar groas aour zo em c'herc'hen a vo dit Gwenole  
« Eur guchen euz va bleo a roan did ive :  
« War ar groas e touan a dirac ar Werc'hes  
« E vi karet gant Metik, ' tre ma vo en bue. »

Ha daoulinet en iliz, hon deuz gred eur boden,  
A roet evit offrant, eur c'houris koar melen,  
Beriguet ho medalen, poket da relegou,  
Da relegou Sant-Breiz karet gant ho tadou.

Goude hon euz haleet hon daou da Breiz-Izel,  
Ha gouelet kalz ilizou : kalz a dourion huel,  
Abatti Landevenec, hag en Douarnenez,  
Lec'h ma oa Kaer-Is hag ar Brinces Ahès.

Gwelet hon euz Mene-Hom, hag ilis veur Quemper  
Mene-Bre, iliz Bulat hag hini Landreguer,  
Kastel-Brest, Sant-Ian-ar-Biz, iliz Salaun ar Foll  
Ha kaera tour zo er bed, tour huel Kastel-Pol.

Gwelet hon euz Kaer-Ahès, Kemperle, Pont-n'Abat,  
Fouesnan, bro ar merc'het koant, Gwengamp hag Huelgoad  
Montroulez ha Lan-Huon, Kroson a Lez-n'Even,  
Callak, bro ar gourino, Kastel-Lin, Rosporden

Klevet hon euz e krosal ar mor beg a Raz,  
Biskoaz den na en tremenaz eb santout aoun pe c'hlas.  
Bet omp en ene Sizun, en Roueseaz, Molenez,  
En énez Vaz, er leodet, ive er Seiz-Ercz.

Eur blavet omp bet euruz evel eal Doue,  
 A setu lec'h pa ho gwelet, an oll a lavaret :  
 « Setu kloarek a Rannou, soul evel eur serven,  
 « Setu Metik, he vestrez, fresq evel eur rosen.»

## III

Devez pardon Saut-Herbot, e klevis eur c'helou,  
 En euz beuzet ma c'halon en eur mor a zaelou,  
 Gant e zad ha gant e mam, d'am mestrizik Metik,  
 E oa choased da bried eur Pagan pinvidic.

Ar pagant-se oa diot hep furnez, hep skiant,  
 Ne gare war an douar nemet ar gwinn-ardent ;  
 Metik paour, pa e gwelet a grene gant ankrez ;  
 Hogen, he zud oa dallet allas ? gant e danvez !

Mont a riz prim da gwelet neuze da Gerzanton,  
 Dre ma tostaen, en e breiz a grene ma c'halou ;  
 War darchen ar bourg e son e oa ar biniou,  
 Tud an eured a Metik beuset en he daelou.

Metik, a dreuz e daelou a reaz ouzin eur zel  
 En eur lavaret *kouraj, mignon fidel !*  
 Monet n ra en iliz, lavaret ra d'ar belek :  
*Gwenole eo a garan hag hen vo va fried !*

Koueza raze d'an douar ractal ar ben-heroz,  
 Ha douget eo dioc'h tu euz an iliz er mez ;  
 Dispak e c'hoef, he dillat, a dispak e bleo :  
 Seblantout a ra beza eun elik paour maro.

Mantret oll gant a glac'har e kouz d'an daoulin,  
 En eur grial ; O Metik zell a drez ouzin ?  
 Pokat a riz d'he dornik d'he diou chod, d'he c'herc'henn  
*O ! Metik ! Metik ! Metik ? pehini a garan*

An disesper e dro d'in, evel eur vantel blom,  
 A chassas pell ac'hanou, pell war zu Mene-Hom,  
 Va skiant a zo kollet, va kalon a zo ien,  
*O ! Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garien !*

Eiz-de goude, a set e kreiz koat a Rannou,  
 War va diou chod a red diou feunteun a zaelou.

Pa glevis e Rumengol o zon anter-noz,  
E lavariz esklamet : Va Doue d'ecc'h bennoz.

« O Gwerc'hes vad Rumengol, sellit ouz va glac'har,  
» Aman oun deud da vervel breman war ho touar ;  
« Varc'hoaz, pa zavo an heol, arc'hentet an evou,  
« Didan an derven goz me a cavet maro !!

« O Metik, va douzik koant, p'hini a garien,  
« Kenavo larant dit er bed man da viken,  
« Gant ar maro unanet, ni c'hoas en em garo.  
« Kenavo er barados; kenavo, kenavo !!!...

IV.

An de varlec'h da zav eol, eun durzunel bep par,  
A hirvoude en derven he c'hlemou a glac'har :  
Ar c'hloarek a oa maro gant an anken,  
En eur lavaret *Metik ! te p'hini a garien !*

Ha c'hloarek paour a starde c'hoas var e vuzellou  
Kroas aour ha bleo du Metik glebiet gant e zaëlou,  
War an derven doa skrivet hano e garante,  
Aa diou galon unanet treuzet gant eur c'hleve...

Kasset oa bet ar c'hloarek da vered Remengol.  
Pa sebeliet e dishoet iliz zakr *Remed oll*  
Iliz patronnez he vamm en deuz bet ken karet,  
Tud iaouanq a Vreiz-Izel, pedit vit-han bepret.

Setu eta Gwenole en e wele douar !...  
Eur miz goude oe klevet huanadou glac'har...  
Eur plac'hik gwisket en du en bered Remengol,  
Deut di pa bedi Doue ha Guerc'hes Remed-oll.

O tremen dre ar vered, velas war eun men be,  
Skrifet neve flamm hanou be mignon Gwenole,  
Epad an nos droulinnet, Metik, wele dourek,  
Ha d'ar men-be, e poke kaloneq.

« O Gwenole, emezi setu te en repos,  
« En douar zakr Remengol ez out deut d'am gortez.  
« Mes ken ma starzo ann de, o ma mvia karet.  
« Er be-man, dre zorn Doue, ni vezo unanet !!

Da zav-heol, eur belek kos, vont da bedi Doue,  
He c'hasas anter varo, gourveet war ar men-be :  
Rei a raz d'ar plac'hik paour absolver a pardon,  
Metik a varvas laouen, raktal, gant ran-kalon !...

En eur vogen ezans ene gwen Metik kez,  
Vel eur goulmik a nijas d'ann ev gant ann ælez :  
Euz a Varados Doue eur goabren arc'hantet,  
War tour iliz Remengol, neuze zo diskennet,

War ar goabren ar Werc'hes ha Sent-kos Breiz-Izel  
Deus kurunen Gwenole, hac e vestres santel ;  
Barzet an amzer gwechal, drant, war e sollennou  
Da Zoue, em brezonnec, e gane ho gwersiou.

Sebeliet he korf Metik, kichen koat Gwenole,  
Ar maro deuz unanet an eil gant eguile,  
Eur c'hloarek barantezuz deus war o be skrivet,  
Ar c'homzo truezus man, gant e zaelou merket :

« Aman repos en peoc'h kloarek Koat ar Rannou,  
« Den a feiz hag a galon, den a garie e vro :  
« En e gichen eo kousket penn-heres Kersanton,  
« Metik an elik Doue maro gant rann galon !!!

O Gwerc'hes mad Remengol, setu o taou baguel  
Kousket en tall och ilis ha dindan ho askel ;  
Vel eur vam karantezuz war gavel e mabik ;  
C'houi dolo evc'z war be Gwenole ha Metik !!!

Cleier, ogrou Remengol, truezuz c'houi sono ;  
Barset ha pelerinet, dælou c'hui a skuillo.  
War be Metik Gwenole, pa refet ho peden,  
Eur beden a garantez ha carguet a anken ?

Bevit e doujans Doue, tud yaouanq Breiz-Izel,  
Pedit Gwerc'hes Reme gol, evit ma viot santel ;  
Sonjit ive e Metik, soujit en Gwenolé,  
Bezit evel-the fidel an eil d'eguile.

---

Koat ar Rannou ( Rann, Rannou, chants, série) *bois des chants  
et des séries.* Koat Bras e dero, ezo en kichen ha d'ar zav-heol da

ilis Remengol. An Drouiset, beleien, ar Vretonnet gwechal c'hoas, difeiza drec'he, bep bloas, gant eur gontel aour, e koat ar Rannou, eur louzouen, hanvet *huel var p'hini* a zav var an der.

Barz. barz ( Barde-poète ) bep bloaz ive en em gave e koat a Rannou hag e *Rumengolou* hini hanvet Remengol, barzet ann Arvor. A re-ma oa tud a skiant pere a gane gwerziou great gant-he war an traou kaer erruet er vro, kana a rent iue meulodi Teutatès doue faoz, pehini voa enoret elec'h man breman Iliz Remengol. D'an hini vije hanvet Barz e roer eurgurunen dero hag eun delen aour, war p'hini a Barz a gane e zonjou.

Gwenclan Marzin, Taliezin, a oa barzet e Breiz-Izel kent ma te uaz en hini ar feiz kristen — Breman zo c'hoaz e Breiz kals Barzet, pere a laka o studi hag o foan evit kenderc'hel en hon touez ar feiz ha iez ho bro. En pen kenta eus ar barzet e man an aoutronez Kermaker, barz Breiz ; an abad Herri, barz an Aviel ; Troudec, barz zar Vugalegou ; Kemar, person vikel-braz a escopti Gwenet, barz Sant-Gwen-Eel ; an abad Klec'h, barz Rugolven, Kaourantin Thomas, barz an Tourtan ; Prosper Proux, e barz Kerne ; An Hagarad, barz Ploue ; I.-P.-M. Ar Scour, barz an Itron-Varia-Remengol ; F.-N. An Huel, barz Ker-ar-Born ; Ollivier Souvestre, barz Plouïan ; an abad Poulouek, kure Landevenek, barz sant Gwenole Karis, person Plougras, barz Menebre, Guernison, barz Peravela, ar re all, pere o deus gret eun niver bras a verziou a sonniou kaer.

- « Kanit a nezho, Breiziz, rag bea int gwerziou
- » Gret gant skiant o kalon, ha gant gwel vad komzou,
- « Gret in e brezonek, mad nan e koz vrezounek,
- « Evel a re zo kals-ze brezonnek-gallek.

Barzet ha pelerinet, kanit gwerziou santel.  
Kanit gloar ha meulodi da Vam tud Breiz-Izel :  
Ho mam hag o Patronez, Rouanez ar bed-oll.  
Mam an dud paour ankeniet *Gwerc'hez vad Remengol*.

I.-P. AR SCOUR.

*Barz Itroun-Varia-Remengol.*

( *Propriété de l'auteur* )

# AN HINI A GARAN

*War eun ton nevez*

An hini a garan, zo coant evel an eol,  
Karantezus evel Gwerc'hez vad Remengol,  
Doue Sent Breiz-Izel, Doue va zadou koz,  
D'an hini a garan, roït bepred ho penoz

An hini a garan, zo douç evel al loar,  
En noz pa sclerijen bugale an douar,  
Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan, zo vel eun alc'houeder,  
D'am c'halon paour e kan zoniou, gwerstou tener.  
Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan, zo vel eun durzunel,  
Pa ve maro ar far en em dol da vervel.  
Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan, zo vel eun elik Doue,  
Eun elik douç a ra joausted va bue.  
Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan, zo douç e hano,  
Evel ar mel eo mad, koant evel ar bleunio,  
Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan, em c'halon a chomo,  
Tre ma vin em bue a goude va maro,  
Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan, gane-me en disheol,  
A reposo eun deiz en vered Remengol,  
Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan, en palez an Drindet,  
Gane-me da viken a vo karet, karet,  
Doue Sent-Breiz-Izel, Doue va zadou koz,  
D'an hini a garan roït bepred ho penoz.

I.-P.-M. AR SCOUR,

*Barz Itron -Varia -Remengol.*

